



**DISPUT**

ENTRE

**EUR C'HERE**

HAC

**EUR BOTOER COAT**

*Var eun tón neve.*

Mar gallan gout ar feçon , e teuin da rima  
 Eun disput a neve flam , d'en em divertissa ,  
 Savet entre ar C'here hac ar Botoer coat :  
 Pa vent crog en eur boutail int daou pot dilicat.

O daou o d'eus prometet e mije digante ,  
 Goude formi eun disput excellant entresé :  
 Eun doucen vio fritet hac eun tam bara guen ,  
 Hac eur bane da eva er fin ar ganouen.

## — 6 —

Mar be glebiet an anchen ar bombard a zono ,  
 A silao gant parfete eun darn a resono,  
 Vit ho lacât da zisput an eil oc'h e guile  
 Ha non pas rima netra nemet ar virione.

Er goan ec'h intentan , eme ar Botoer coat ,  
 E me a zeu da viskan treïd an dud dilicat ,  
 Ha te Kereer infam gant da vouteïer ler ,  
 A zigaç ar c'hlenvejo hac eun nombr a vizer.

Eun tam eo istimet huelloc'h ma etat  
 Evit n'en deo da hini , pot ar bouteïer coat :  
 Ma rankje beajerien bale gant sorguello  
 E vent eun anter hirroe'h oc'h ober campagno.

Evit prepari 'n douar da lacat an trevat  
 Eo eun dra necesser cavet eur boto coat ;  
 Ne veler dèn o palat er park gant boto ler  
 Ha c'hoas e fell dit laret ne n'on ket necesser.

Goud a ran eo ar boto coat a gonserv ar yec'het  
 Hac a brepar an douar evit lacat an ed ,  
 Evel ma c'her da redec er parc gand-o 'veicho  
 E scanvoc'h ar boto ler evit eur sorguello.

Pa deui an erch , ar scorn , hac ar goan kalet ,  
 E ranko ar C'hereour paca e vinaouet ,  
 Ha me doucho an arc'hant partout er marc'hajo  
 Ha te zello ouzin , ha digor d'a c'heno.

— 7 —

Pa erruo mis meurs hac an ñeve amzer,  
 Da viska 'n habijo brao hac ar boteïer ler,  
 Neuze na vo istimet netra eur boto coat;  
 Eur boto ler da vale a zo traou dilicat.

Alies e rankes mont da dy ar c'hivijer  
 C'hoas na pe nemet tri skoët pe eun tri skoët anter,  
 Ha me laca assambles betec c'huec'h ugent skoët  
 Da brena ar c'hoat boto evit ar baysantet.

Goël a ze dit, ma mignon, pa d'eus eur bern arc'hant;  
 An neb o deus neubeutoc'h a vev honestamant.  
 Me a deb kig ha zouben ha ma yod da greis-de :  
 Ordinal ec'h intentan on bevet couls a te.

Poent eo din finissa rac an nos a dosta,  
 Hac an hostis a jeno pa na evomp netra,  
 Hac a roi din hon c'honje, Coader ha Kereer,  
 Da bartial eus he dy ha mont da gaet ar guer.

Ebars en hostaleri 've aliez rezonio,  
 Disput entre 'r vignonet ha chass-bleo avecho;  
 Ar c'hoste cre a c'hone ebars en peb affer,  
 Mar keres ni a velo, eme ar C'hereer.

Goude leis cov e crogjont 'vel daou ghy animet  
 Ha stagan d'en em gannan evel tud malisset,  
 Ken ma rankas an hostis kemer e vas ribot,  
 Ha skeï var zin diskregui en feçon ma oant krog.

— 8 —

Goulenomp eur chopinat d'en em dispartia :  
 An hostis hon servicho mar deuomp d'e bea ,  
 Hac evomp pep a vanac'h er fin ar ganouen ;  
 An oll a rank caout boto pe vale diare'hen.

An hini en eus rimet an disput dilicat  
 Savet etre eur C'here hac eur Botoer coat,  
 En eus gret meur a hini, e hano YAN AR GUEN,  
 Hac a veler ordinal en fin ar ganouen.



Moulet é Montroulez, é ty J. HASLÉ, ru a Aiguillon, 8.

E pe leac'h e caver bep seurt levriou gallec ha brezounec evit an oferen,  
 ar retrejou hac ar missionou ; Canticou, Litaniou, Imachou, Taolennou,  
 Medalennou, Chapeledou, Paper, Plun, Liou, etc., etc., etc.